

(355, suite)

Triumphou
ar General Moreau,
Gumidi a Voutroulez,
General arme ar Rhin, unan eus ar re vella a zo en Franç,
d'ar Bôket vad eus a Vreiz.

Var ton : Divan va scam, en toul va dor.

(356) An Impalaer ⁽¹⁾ a lavare :
Palluc'homp ar Republik-se ⁽²⁾;
Ma na vez grêt fin anezhi,
E vezimp distrujet ganti.

« List-en, emedi Bonapart ⁽³⁾,
» P'en defe deg-cant-mil zoudart :
» Ne gontomp nepret anezho
» Nemet goude trec'het varmo.

» Pa na gar senti ouz ar stur ⁽⁴⁾,
» Ouz ar garrrec e rays sur :
» En Itali e voe gossaget ⁽⁵⁾,
» En Allamagn e vo flastret .»

Hac en mont ha guervel affo
Carnot ⁽⁶⁾ assambles gant Moreau ;
En em glêret int bet ractal
Erit rei da Cezar ⁽⁷⁾ ar bal.

Cetu Moreau neuze soudan

O tastum e oll danserien ⁽⁸⁾ :
Pêvar-ugent mil, pe vandro,
Ha sonerien ⁽⁹⁾ aleiz ganto.

Pa velas Kraï ⁽¹⁰⁾ an dra-ze,
Scravat e scoiarn a eure :
« Me ranc, emezan, souerzi ;
(357) » Aman ervat e vo c'hoari.

» Ha me et côs er vicher-mân,
» Gant eun den yaouanc en disân .
» N'eus fors, me ranc dansal guella,
» Pe mervel ⁽¹¹⁾ gant enor amâ .»

Hac int monet o daou ractal,
Ha digueri gempen ar bal ;
Mour a zerev o deus danset ⁽¹²⁾ ;
Ar Francisien ne scuirgent qet.

Kraï ervat hac e oll dud
A zo et fez, bouzar ha mud ;

-
- (1).- Impalaer an Autrich. (2).- Ar Republik a Franç.
(3).- Bonapart, kanareet goude dindan an hano a Napoleon, guella brezallecaer a voe biscoas.
(4) et (5).- Forcet, en defot a rêson.- Bonapart a drec'has oll eno.
(6).- Ministr ar Brezel, ha den savant bras. (7).- En em hanvet Cezar dre lorc'h.
(8).- Dastumet e arme, o c'hannas oll. (9).- Niver a ganonniou.
(10).- Kraï, general côs da impalaer Autrich. (11).- Kraï en devoa re fouquet gant e gomzou. (12).- Ar Francisien a vo trec'h.

304

Crena rent rac hor zonerien (1),
Gen a varrent evel qellien.

Uguent mil a zo tremenet (2),
Daou c'hannent a zo goal glanvet (3),
Ha Kraï, en eur saereal,
Zo t'c'het da heul ar re-all.

Hoguen, Moreau, o c'houd beva,
A lavaras qer coant ha tra :
« An dud qeiz-se a zo re scuis,
» lassomp anezhe da Paris. » (358)

Pemp mil varnuquent zo paqet (4),
Kraï erwat zo achappet ;
Rac, daoust ha ma zeo ar c'hossa,
Redec a rê ar buanna.

En eur vont q'it e lavare :
« Goussa tud ar Francisien-ze !
» Ne zansin pelloc'h gant Moreau,
» Rac re vuam en c'hass endro.

« Quelloc'h eo, emezan, din-me
» Lezel gant an drouc speret-se
» Ar fest en d'oa 'n Autrou Thugot (5)
» Orzet, a bell, din ha d'am zud.

» Rac a draso mad a voa eno !
» Guin ha cuignou, rost ha bero (6) ;
» Gen en deveus Moreau casset
» Da Vassena (7) lod ar banqet. »

Ganemp-ni en deveus ive

Lezet Kraï dillat nere,
Cressiou aleis, gant pallenou,
Calz boutou l'er ha fors boutou (8). (359)

Hoguen, cetu c'hoas caeroc'h tra !
E zonerien ar re vella (9)
Gant an hast en d'oa e redet,
En e zilerc'h a zo chommet.

It, tud yaouanc, it-ta d'ar fest,
Ne chommet qet da glac ho rest,
Ma vezo lavaret eur deiz :
« Meur a Voreau a zo en Breiz ! »

C'houi, Montroulezis, peurguetqet,
En ho touez pa zzo ganet,
Ha chom a rafac'h da ouzgal
E lec'h monet gantan d'ar bal ?

Henor deân ha da Garnot,
Da Vonapart ar muia lod,
Ha da guement a vez ganto,
Italc'h-mat oc'h ober mad ar vro.

Rac-se ta, canit n'os ha deiz,
Gement hini a zo en Breiz :
Ar Republik a drec'h ato,
Ha qeit hac ar bed a bado. fin.

Compoet gant ar c'itoyen D'Em,
oberour Butin en Kemper.

(Vol. VII, p. 355-359.)
strophes non numérotées.

- (1).-Hor c'hannou a zistruje oll. (2).-Uguent mil den en deus collet Kraï.
(3).-Eur niver bras blesset. (4).-25 mil prisonnier.
(5).-Thugot, ministr autrichien, en devoa grêt pourvision vad evit arme kraï : oll int bet qemeret ganemp.
(6).-Guin, guin-ardant hac a bep seurt lipouzeres chomet ganemp.
(7).-Massena, trec'hour bras, ha mignou da Vonapart.
(8).-An oll magazinou, pourvet eus a bep tra, chomet ganemp.
(9).-Nomb a ganonion, fusillou, poult, ha traso oll, qemeret ganemp.